

Son ^{quer}
Margodic La Boessier.

(269, suite)

Tostait oll, tud yaouanq, hac e clefot cana
Ur son a so composit a nevez vit ar bloa,
A zo grêt d'eur plac'h yaouanq e deus quittet e brö:
E c'herent hac e lignez a zo oll en canrou.

(270)

D'an amzer ma voa collet, e voa 'r goas gant ezad,
Ebars en hostaleri oc'h eva boutaillad,
En eur eva d'e yec'het, en deveus lavaret:
Autrou, ho merc'h Margodic am boa c'hoant da gavet.

An Autrou, ^{our} vit e glêvet, ~~da lavarar metra~~ ^{respont prontamant:}
Va merc'h ne dea get savet evit mab ur paisant
~~An strö da voa present, a respontas dezä.~~
E zad a zo digentil, e mam a zo itron,
Va merc'h a zo demerzel deus a gondition.

Hac e vemp hon daou contant, ezud hac e ligne,
Ma voefen ho pe desseign ha bolonte da se,
Va merc'h a zo demerzel deus a La Boessier,
Ne gretten get e yac gant ur palafinier.

An goas en devoa speret, na lavar quer ebet,
Hac a lezas an itron da ober ~~e~~ ^{re} get;
Mes pa errujont er quër, e voe dê annoncet
Gant o merc'hic Henoric e voa Margot collet.

(271)

Neuze e savas ar c'hlascq partout dre an noblang;
Ne voe na craou, na cos-tij deus an appartenang
Na chom na sal, na qequin, nac ivez marchossi,
Na vre clasqet Margodic, bete campur ar c'houldri.

Re diverzat eo bremä, poent eo mont da goannia;

Sonnet eo cloc'h ar c'houver, poent e deomp azeza ;
Eno ni a goullo penos e vez grêt,
Erit va merc'h Margodic a rencan da gavet.

Varc'hoas vintin, pa savin, me scrifo da Voengamp,
Erit digas archerien amañ incontinant,
A yêl da dy ar hini en deus-hi anlevet;
Me a zisco d'ar praysant laeres demezelet.

(272) Antronos vintin, pa savas, e yas da dy ar goas :
Clêvet emeus Margodic so anlevet gancac'h ;
Te a c'heus-hi anlevet, ha te din he rento,
Pe ma na vez get crouquet ar galeou a po.

Ar goas en devoa speret, a respont prontamant :
Me na meus-hi get quelet ; mes me c'harje presant,
Da glêvet ar preposion a glêvan gant e zad,
Va zamal deus a un dra ha n'en don get coupabl.

Gwir eo, ho merc'h Margodic ha me en eur garrie :
Ma vec'h prest d'hon eureugi, me gred en em gafe ;
Ma rafen ur griaden d'am douf, d'am c'harante,
Seiz, leo tro rond diouzon va mouez a anafte.

Ha ma n'am c'hleo ar seizvet, me yêlo c'hoas arauc,
Ma na medi en Benac'h, ema e Sant Ithop.
Ac'hane me a yêlo pen-da-ben d'an hent bras,
Da quichen ur gos vezen a zo e Langolvas.

(273) Ac'hane me a glêro hac hi vo et en kaer ;
Antreet er Gouent-nevez, pe en coent Calver,
Adalec ilis ar feunteun, me gret en c'hêro prest ;
Ma medi en Landerne, pe autramant en Brest.

An autrou a ya d'ar quër, pa na gompren netra,
Ar Person a ya neuze, zo finnoc'h equeta,
Hac en digare farcal e lavaras d'ar goas :
Me avoar qercoulz ha te pelec'h emañ ar plac'h.

Te ac'heus-hi anlevet, te rang e eureugi,
Pe ne c'heus affer pelloc'h da zont al lec'h ma vin.
Ar goas, joais e galon, a respont prontamant,

Hac a lavar d'ar person neuze e santimant.

Contant on d'e eureugi, pa meus-hi anlevet,
 Me en em gavo ganec'h el lec'h ma leveret,
 Ar goas hac hi ya neuze gant an hent pen-da-ben,
 Er rentas da eureugi e porchet Sant-Germain.

Mes pa errujont eno, e bisur, e mam, e zad,
 A lamous an demezel digant ar c'hamarad.
 Ar goas a chommas neuze un nebeut er porchet,
 Dr gonsideri penos e voa bet attrapet;
 Da sonjal er finesse en deus bet ar person,
 Diqueri d'or va c'haouet ha leusgel va fijon.

(274)

Deiz pardon Gurunuel, an deiz genta a vae,
 E voa va mestrez eno, ha me a voa ive;
 Aben un nebeut goude, e voamp-ni glac'haret,
 O sonjal peguer buan e voamp dispartiet.

Et eo va mestrez d'ar gouent, hac hi leun a c'hlaç'har;
 Me zo vel un druzunel a ve collet ebar;
 Mantri a ra va c'halon, gouela va daoulagad,
 O sonjal biquen james na ellin e attrap.

Et eo va mestrez d'ar gouent, hac hi quisset en gris,
 Me a ya prest da ermit da forest ar marquis;
 A savo va ermitach e bord coad ar velin,
 Birviquen va daoulagad, va mestrez, n'o quelint muin.

(275)

Nep en deus composet ar son so ur c'hloarec yaouanq,
 A zo gant ur procuror er quet deus a Bengamp,
 A voa bet e Montroulez e poursu estudi,
 Hac a voa bet reformet deus scolach Creac'h-Joli.

Erit da facha ouzin nezeus get a affer,
 Me a zo hirio amã, varc'hoas ermès a quër;
 Me a zo ur c'heveleg zo dies da attrap:
 Da nav heur e Lannion, ha da zec e Langoat.

fin.